

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

56. AR MENOBR<sup>I</sup> ( folленнou 186 - 189 )

Iannik Chiffon, iannik an Heri  
 Zo ed o daou dar Menobri  
 Evid delc'hel hostaliri  
 Hir eo an ent pel eo mond d'hi.

Er Menobri pa zint erruet  
 Entren er pors o deus goulennet.  
 Ar Pab ractal vel man deus klevet  
 An or dezo a neus digoret.

Iannik Heri a lavare  
 Da Iannik Chiffon én deis a voë :  
 - Te a ha dar ger, me nen din ket  
 Ma gourhemennou a reffet  
 Dam zad, dam mam, dam c'hoarezet  
 Da Mari Prioll ma muan karet.

Iannik Chiffon a lavare  
 En ti an Heri gos pa harrue :

- Gourhemennou o c'heus digant o mab ianik Heri  
 Zo prisonier er Menobri:  
 Hir eo an hent pell eo mont d'hi.

An heri kos a lavare  
 Da Iannik Chiffon vel men kleve :  
 - Te a zo bet kaus d'am mab mond var ar mor.

Iannik Chiffon evel ma c'hlevas  
 Er mes an ti e sortias  
 Da ti Vari Priol en a hias.

Bonjour dec'h Marik ar Priol  
 Gourhemennou o c'heus digant o tous, Ianik Heri  
 A zo prisonnier er Menobri:  
 Hir eo an ent pel eo mond d'hi.

Marik ar prioll an deveus gret  
 Ar pes ne rache den e-bed :  
 Deus goezet he douar hag he zi  
 Da pea ransson Iannik Heri.

- 154 -

Iannik Chiffon, Marik ar Priol  
 Zo ed o daou d'ar Menobri  
 Da pea ar rançon Iannik Heri:  
 Hir eo ent, pel eo mond di.

Er Menobri pa zint erruet  
 Entren er pors o c'heus goulenet  
 Ractal dezo eo bed digoret.

Er pors evel ma zeo entreet  
 Dan douar eo bet simplet.

E vellet an n'hezan stag deus ar strak  
 Evel all loened mud e ti he zad.

Marik Prioll a lavare  
 D'ar c'habiten en deis a voë :

Kimerit arc'hant deus va davancher  
 Lest va douss kloarek da zond dar ger.

Pa erruimp en om bro  
 Nhi kavo belek ag on eureujo.

( Ar 5 poz dibenn ne glotont ket ouzh ar werz-mañ  
 gas a reont da soñj pozioù 'zo eus Janed ar Iudek

Dar iaou gamblut e harrue  
 Dar Sul Fask he hofferenne.

Pa voa he sevel dar kreïen°      ° Komp.: krec'hi  
 E deuas poan dizi hen he fen.

Pa voa ed dirag an or dall  
 E klevet he halon he strakall.

Pa voad gant ar gouriou  
 E koueze Mari var he hino.

Benos Doue var he hine  
 Requiescat in pace.

vvvvvvv

Jannet Puill, 14 janv. 1851.

vvvvvvvvvvvvvvvv